



**HAL**  
open science

## Mélanie Jouitteau a ergerzh Bed al lavar

Mélanie Jouitteau

► **To cite this version:**

| Mélanie Jouitteau. Mélanie Jouitteau a ergerzh Bed al lavar. Kazetenn Ya, 2009. hal-03830507

**HAL Id: hal-03830507**

**<https://hal.science/hal-03830507>**

Submitted on 1 Dec 2022

**HAL** is a multi-disciplinary open access archive for the deposit and dissemination of scientific research documents, whether they are published or not. The documents may come from teaching and research institutions in France or abroad, or from public or private research centers.

L'archive ouverte pluridisciplinaire **HAL**, est destinée au dépôt et à la diffusion de documents scientifiques de niveau recherche, publiés ou non, émanant des établissements d'enseignement et de recherche français ou étrangers, des laboratoires publics ou privés.



Distributed under a Creative Commons Attribution 4.0 International License

Atersadenn Mélanie Jouitteau. Kazetenn Ya. 2009.

Penaos en em gaver er CNRS ?

Graet em eus un aotreegezh war ar brezhoneg e skol-veur Roazhon, unan all war al lizhiri modern e galleg, hag un desenn e skianchoù al lavar da heul e skol-veur Naoned, dindan renerez ur vaouez nevez deuet er vro, Hamida Demirdache, hag e oa hi bet Noam Chomsky he rener desenn, en "Massachussets Institute of Technology". Plijet bras e oan bet gant ar sirius ma veze al labour graet el labourva en Naoned, gant tud evel Jean-Pierre Angoujard, a anavezit marteze dre al labour ma kas war ar yezh Gallo. Da heul va DEA em boa tapet ur yalc'had skoazell evit an desenn digant ministerezh an enklask.

Hep ar skoazell-se n'em bije ket gellet mont d'en em stummañ e pep korn Europa, da vont da heul stummadurioù etrevroadel e pad an hañv, pe da welet ar brezegennoù pouezus a veze en Europa. Pouezus-tre eo e c'hellfe ar skolioù-meur kas o studierien da zeskiñ traoù e pep lec'h er bed.

Ar gouarnamant hiziv a c'houlenn ec'h embannfe ar skiantourion traoù e saozneg ingall, hag e barzh ar journalioù gwellañ er bed, mar plij ! Met ar studierien peurvuiañ ne vez ket roet ur gwenneg dezhe da vont da heuliañ seminerioù en estrenvro e korf o bloavezhioù tesenn -nag ur stummadur e saozneg kennebeut all.

War lec'h an desenn on bet evit ur bloavezh en Euskadi e Gasteiz, en UPV (Universita del Pays Vasco), peogwir ez eus eno ur greizenn labour dreist diwar-benn ma dachenn enklask resis: ar sintaks. Ur bloavezh all c'hoazh on bet o kelenn ar yezhoniezh e departamant ar galleg e skol-veur Leiden, en izelvroidoù, a-raok bezañ digemeret er CNRS en ul labourva e Paris 7 ur bloazh 'zo.

Bremañ, gant an nebeutoc'h-nebeutañ a bostoù a vez bep bloazh gant ar CNRS, n'ouzon ket re petra a vo dazont an enklaskoù evel hon re. Gwelout a ran tud a c'hellfe kiañ forzh pegement, ha degas traoù pouezus meurbet d'hon gouizidigezh war an dafar. Tud yaouank, stummet gant ar re wellañ, ha leun a startijenn anezhe. Digemeret e vezont laouen e pep lec'h all en Europa pe er Stadoù Unanet, ha sklaer a-walc'h eo evidon ne zistroint ket da labourat e bro C'hall ma za an traoù war washaat evel m'emaint gant ar gouarnamant. Mantrus eo gwelet kement-se.

Perak Kemperle ?

E Jussieu, e Paris emañ ma labourva, met dav' eo din chom er Finistere, din da vezañ tost d'am danvez enklask, ar brezhoneg. Kemperle resis 'ni eo em eus choazet, peogwir ec'h anavezan tud dreist eno. Tud "beau leur coeur dedans", c'hwi oar...

Ur chañs eo evidon bezañ o chom eno a fed yezh, peogwir emañ troet hon skouarn kleiz sa tu bro Gwened hag hini all sa tu bro Gerne...Ur sapre stereo a fed rannyezhoù!

Petra eo ho labour, resis ?

A bep seurt yezhourion a zo, ha doareoù diforc'h kenañ a vez da studiañ al lavar.

Ar yezhourion evelomp a vez graet "jenerativisted" ac'hanomp. Klask a reomp kompren resis petra eo a benn ar fin an dra a vez graet langaj outi. Penaos e teu al lavar d'ar vugale? Petra 'zo kaoz e c'hell ur bugel krouiñ frasenoù n'en deus ket klevet james en a-raok? Petra e vez dav d'an nen gouzout a-benn ober-se? Ur raktres etrevroadel ni' eo evit dizoleiñ reolennoù yezhadur hag a gerzh evit pep yezh mab den er bed, a-benn kompren petra eo al lavar.

Em labour tesenn em eus diskouezhet da skouer penaos e oa heñvel evit kalzig a berzhioù gramadel ar brezhoneg, an arabed, hag ur yezh all komzet e bro Chiapas: ar Chalcatongo Mixtec. Ar yezhoù-se a vez diforc'h kenañ etreze a fed fonologiezh, morfologiezh, pe istor memes, anat deoc'h. Kentelieus kenañ e vez gwelet eta ar verb o'ch ober memes mod gant e rener, pe reolennoù urzh ar gerioù o vezañ ken heñvel pa vez kavet an doare prop da soñjal oute. Touchet e vez aze un dra don a-walc'h, hag a ch'ell lavar deomp kalz war petra a sinifi bezañ ur yezh mab den.

War forzh peseurt yezh er bed e c'hellfen labourat a-benn kas an enklask-se, peogwir int bet krouet tout gant empennoù tud. Diazez ma enklaskoù war ar brezhoneg a hini eo em eus choazet ober, peogwir e teue mod pe vod ar yezh ganin dija, ha ivez peogwir em beze plijadur e-leizh o welet yezhourion deus bro Japan pe Norvej implij ar pezh a ouzomp deus ar yezh-se evit o

enklaskoù dezho. En arvar bras emañ hon yezh bremañ, met joa em bez bopred o welet e c'hell reiñ boued d'un enklask a gavan ken etrevroadel hag universel e bal hag e dalvoudegezh. Ar memes plijadur am bez o labourat war ar seurt gallegoù a vez komzet e gwir ha ne vez ket kavet o livioù er yezhadurioù...!

Ha gouest oc'h da zisplegañ ar pezh a rit gant al lec'hienn ARBRES.

Kavout a ra din ez eo studi ar yezh brezhoneg en ur stad mantrus hiziv an deiz. A-fed sintaks nemetken, e vankfe deomp 5 den leun amzer d'an nebeutañ-tout evit kas da benn labourioù diazez a vez graet war ar yezhoù all ! Ur vezh ruz eo, pa welomp pegen pouezus e vez an danvez studi-mañ, ha pegen mallus eo.

Savet em eus al lec'hienn **ARBRES** ('Atlas Rannyezhoù ar **BRE**zhoneg : **S**intax') evel ur respont d'ar vank-se, evel ur galv sa tu kevredigezh ar vrezhonegerien hag hini ar skiantourien, ur galv evit labourat a-gevret ha sevel ostilhoù efedus evit labourat war ar yezh. Digor eo ARBRES : pep hini a c'hell dont da skrivañ notennoù eno, dre ma kerzh gant ar sistem wiki, evel ma ra 'wikipedia'.

Kinnig a ra ARBRES ul levrlennadurezh deus pep tra a zo bet skrivet war framm ar brezhoneg, fichennaouegoù enklask, hag ur yezhadur en linenn aes e implij. Savet e vez ivez ul listenn korpusoù a c'hell servij evit studiañ doareoù yezh diforc'h, ha liammoù e-leizh evit ergerzhout an dafar. Bout ez eus evit ar mare [e 2009] 150 pajenn en linenn, ha kreskiñ a ra buan a-walc'h. Ul levraoueg en linenn a zeuio da glokaat al lec'hienn a-benn nebeut, peadra da dizhout aes al levrioù enklask a vez ezhomm.

Ar pep aesañ a vez mont da weladenniñ al lec'hienn. [<https://arbres.iker.cnrs.fr>]

Petra a blij deoc'h ober evit cheñch soñjoù, goude ur frapad labour tenn ?

Lakaat ma fenn war ul labour all, peurvuañ, meus aon !

Ha gant piv ho pije c'hoant bezañ bac'het en ur saverez e-pad un eur ?

Gant forzh pe hini a c'hellfe kas ac'hanomp er-maez ! Gwelloc'h e vez din an daremprejoù lib' pa vez kaoz deus rankontriñ tud.

Dont a rafe ur voudig da ginnig deoc'h seveniñ un het, hag unan hepken. Petra a c'houlennfec'h diganti ?

Pediñ he c'hoarezed da zont d'am weladenniñ.

En ur ribourzherez (machine à remonter le temps) emao'h. Kinniget e vez deoc'h dibab ho kantved ha ho lec'h bevañ. Petra a zibabit ?

Ul lec'h en dazont. Bed ar skiantoù ne oa ket dereat d'ar merc'hed er c'hantvedoù paseet.

Petra eo ho «plijadur» pemdeziek ?

Sellout ouzh an Natur. Klask kompren. Chom hep kompren. Sellout c'hoazh. Evañ kafe. (en urzh-se)

Gant piv ho pije c'hoant da eskemm ho puhez e-korf ur sizhunvezh ?

Gant NS president ar Frañs, evitañ da welet petra a sinifi bezañ klaskour barzh bed ar wirionez.

Peseurt micher ho pije bet c'hoant ober ha n'ho peus ket graet ?

Sokiologiezh pe brederourizeh em bije bet c'hoant gober, marteze a-walc'h. Un doare all da studiañ mab-den.

Dirak petra e vezit bamet ?

Ar yezhoù. Pebezh prof evidomp paour kaezh tud ! Sonjit 'ta : petra a chomfe deomp deus hon bed

hep al langaj ?

Peseurt donezon ho pije bet c'hoant kaout ?

Re yaouank en em santan c'hoazh a-benn respont d'ur goulenn ken pouezus. Goulit mar plij ganin c'hoazh a-benn dek bloazh.

Petra a zo en ho kerzh, un dra didalvoud oc'h tomm-tre outañ, ha na rofec'h da zen, e mod ebet ?

Hé, hé, Blev ! Ne larin ket deoc'h ! Kuzhet mat eo, anat deoc'h !

Petra a zo, er bed tro-dro deoc'h, ha ne gomprenit ket hag ho pije c'hoant e vefe displeget deoc'h ?

Sistem urzh ar gerioù e brezhoneg ni 'vefe. Petra 'zo kaoz e vez dav deomp lakaat ar verb en eil plas er frasenn, gant reolennoù resis war petra a vez dav lakaat en araok, pa 'vez ken aes a-se lakaat ar verb e plas kentañ 'a-wechoù' (cf. 'ez an da welet')?

Ur mennozh ? Skrivit din ar respont.où war al lec'hienn ARBRES!

Pehini eo, hervezoc'h, talvoudusañ ijñnadenn mab-den ?

Ar skrivañ, peogwir e c'heller mirout roud deus ar gavadennoù all drezañ.

Bez' ho pije da adkregiñ gant ho puhez. Petra a cheñchfec'h ?

Karet em bije bet kaojeal yezhoù diforc'h, ha me bugel. Kresket on bet re bell hep gallout touchañ yezhoù all estreget ar galleg, pa ouzomp e vez ken pouezus kaojeal muioc'h a hini a-raok tri pe pevar bloaz.

Evit tud deuet, deskiñ yezhoù a zo disheñvel kenañ, poanius awalc'h, ha n'hall ket james bout ken efedus.

Da beseurt goulenn 'ho pije c'hoant da respont "Ya!" ?

C'hwi soñj deoc'h eo ur mennozh vat e kroufe Europa ur grezenn studi war yezhoù Breizh, a live gant ar pezh a vez kavet e pep lec'h all ?

---

### **goulennoù chomet direspont:**

Peseurt levr a yafe ganeoc'h war un enezenn didud ?

Peseurt meuz a rit p'en em lakait da geginañ ?

Petra eo ar c'hrenn-lavar a blij deoc'h ar muiañ tout ?

C'hoant ho pije kas ul lizher klemm d'un den resis. Da biv e kasfec'h anezhañ ha perak 'ta ?

Hag ul lizher gourchemennoù ?

Deuet oc'h da vezañ ul logodennig vihan a c'hell kas he fri kurius e pep lec'h. Pelec'h e kasfec'h anezhañ ?

Piv eo an den en deus roet deoc'h ar c'hentelioù pouezusañ evit ren ho puhez (estreget ho tud, anat) ?

Pehini eo ar gentel bouezusañ da reiñ d'ar vugale yaouank, hiziv an deiz ?

Gant petra oc'h hegaset alies, er vuhez pemdeziek ?